

Urzh an Erminig

Urzh an Erminig krouet e 1381 a zo unan eus koshañ urzhioù brezel hag enor en Europa.

E 1344 e krou Edouarzh III a Vro-Saoz urzh « Marc'hegerien Sant Jord », ha goude-se hini ar Gabestrell e 1348. Yann II, e Bro-C'hall a grou e 1351 Urzh ar Steredenn. E 1430, eo hini ar C'hreol aour gant Dug Bourgogn ha damc'houde hini ar Greskenn gant Reun Añjev e 1448.

Yann V, dug Breizh, en deus bet c'hoant dre sevel Urzh an Erminig da ziskouez pouez an dugiezh war an noblañs hag ar youl da vezañ unanet tro-dro dezhañ.

Degemeret e vez merc'hed ha partabled en Urzh. Ar varc'hegez ken-tañ eo Janed Navarra hag an eil eil Janed Albret, kontez Richmond hag e 1447 Izabel Skos, dugez Breizh.

Evel an holl urzhioù marc'hegiezh eo bet berzet Urzh an Erminig gant reveulzi bro-C'hall hag ar c'holier diwezhañ a oa war bez Yann IV e iliz-veur Naoned a zo bet distrujet.

Distro an Erminig

E 1972, ar senedour Georges Lombard a gemeras lec'h René Pleven e penn ar C'elib hag evit trugarekaat anezhañ en anv Breizh a-bezh en deus bet ar soñj da adkemer enoradenn an dug Yann IV. Ar pal ne oa ke adsevel un « urzh » kozh met kentoc'h kaout un arouez hengounel bev.

Roet e voe ar c'holier da René Pleven d'an 29 a viz Gwengolo 1972.



E 1988 e kemeras Skol Uhel ar Vro plas ar CELIB evit trugarekaat tud – paotred ha merc'hed – o doa, dre o obererezh hag o engouestl, graet enor da Vreizh.

An Erminiged a-vremañ

E 1972 e Pondi
René PLEVEN †

E 1973 e Roma ha Roazhon
Gabriele PESCATORE
Jean MEVELLEC †

E 1988 e Roazhon
Vefa de BELLAING †
Pierre-Roland GIOT †
Polig MONJARRET †
Henri QUEFFELEC †

E 1989 e Naoned
Bernard de PARADES †
Marivon QUEMERE-JAOUEN †
Per DENEZ †
Louis LICHOU †

E 1990 en Alre
Charles LE GALL †
Chanig LE GALL †
E. LE SCANV (GLENMOR) †
Joseph MARTRAY †
Albert TREVIDIC †

E 1991 e Kemper
Georges LOMBARD †
Robert LEGRAND †
Pierre LAURENT †
Pierre-Jakez HELIAS †

E 1992 e Sant-Maloù
Michel PHILIPPONNEAU †
Ronan HUON †
Yvonne JEAN-HAFFEN †
Jordi PUJOL

E 1993 e Dinan
Leanez Anna-Vari ARZUR †
Herry CAOUISSIN †
Yann POILVET †
Jean TRICOIRE †

E 1994 e Gwened
Ivetig an DRED-KERVELLA †
Pierre LEMOINE
Yvonig GICQUEL †
Alan STIVELL

E 1995 e Gwenrann
Jacques BRIARD †
Loeiz ROPARS †
Jean FREOUR †
Ivona MARTIN †
Lois KUTER

E 1996 e Pont 'n Abad
Pierre LE TREUT †
Rita MORGAN WILLIAMS
Joseph LEC'HVIEN
André LAVANANT

E 1997 e Kintin
Jean-Jacques HENAFF
Jean L'HELGOUACH †
Dodik JEGOU
Raymond LEBOSSE

E 1998 e Gwitreg
Goulc'han KERVELLA
Henri MAHO †
Pierre LOQUET
A. CORRE (Naig ROZMOR)

E 1999 e Naoned
Jean-Bernard VIGHETTI
Riwanon KERVELLA
Patrick MALRIEU
Denise DELOUCHE

E 2000 e Pondi
Tereza DESBORDES
Lena LOUARN
René VAUTIER
Pierre-Yves LE RHUN

E 2001 e Landerne
Pierre TOULHOAT
Rozenn MILIN
Breur Marc SIMON
Dan ar BRAZ

E 2002 e Lannuon
Henri LECUYER
Yves ROCHER †
Michael JONES
Robert OMNES †

E 2003 e Sant-Maloù
Jean-Louis LATOUR
Gilles SERVAT
Angèle JACQ
René ABJEAN

E 2004 e Kastell-Briant
Albert POULAIN
Yannig BARON
Marie KERMAREC
Yann GOASDOUE
Pierre-Yves MOIGN †

E 2005 e Loktudi
Jean OLLIVRO
Ewa WALISZEWSKA
Pierre LE PADELLEC
Jean KERHERVE

E 2006 e Plañvour
Jean-Pierre VINCENT
Claudine MAZÉAS
Xavier LECLERCQ
Claude STERCKX

E 2007 e Sant-Brieg
Rhisiart HINCKS
Martial PEZENNEC †
Job an IRIEN
François LE QUEMENER †

E 2008 e Roazhon
Roger ABJEAN †
Gweltaz ar FUR
Yvonne BREILLY-LE CALVEZ
Viviane HELIAS

E 2009 e Ankiniz
Jean-Christophe CASSARD †
Tugdual KALVEZ
Yann-Fanch KEMENER
Jean-Guy Le FLOC'H
Mona OZOUF

E 2010 en Oriant
Catherine LATOUR
Annaig RENAULT †
André CHEDEVILLE †
Donatien LAURENT

E 2011 e Kemper
Andrea ar GOUILH
Yann CHOUCQ
Joseph Le BIHAN
André POCHON

E 2012 e Gwengamp
Yves LAINE
Albert BOCHER †
Ivonig Le MERDY
Frères MORVAN

E 2013 e Sant-Nikolaz-an-Hent
Jean-Jacques MONNIER
Yves-Pascal CASTEL
Martial MÉNARD
Tangi LOUARN

Programm

ar Sadorn 15 a viz Du 2014

Kendiviz

**Breizh, rannvroioù Europa
ha demokratelezh perzhiañ**

dindan renerezh a enor Patrick Mareschal

10e : degemer

10,15e : Jean-Jacques Monnier, istorour.

*Ersavioù stroll en istor ar Vretoned pa vez an
dalc'h gant Breizh*

10,50 : Jean-Pierre Le Mat

*Klemmoù an XXIVet kantved evit “Bevañ,
divizout, ha labourat e Breizh”*

11,30 : Tibor-Louis Leh, alvokad gall-ha-hungarad (da vezañ
kadarnaet)

*Erbedadennoù Europa evit a sell ar rannvroioù
ha pennaennoù Europa evit ar gouarn lieslive*

12e : taol grenn ha kendiviz diwar-benn an adreizh tiriadel gant tud
eus ar metoù politikel hag eus ar c'hevredigezhioù keodedel

Lid kolier an Erminig

14.30 : degemer

15.00 : roadenn kolier an Erminig da :

Philippe Abjean
Nicole ha Félix le Garrec
Jacqueline Le Guen
Erwan Vallerie

roadenn Medalenn Skol Uhel ar Vro da:

Poellgor Anna Breizh
Kaieroù Klemm an XXIVet kantved

18.30 : Kottel ha taoliad-voued

Un niver a blasoù bevennet a zo; goulenn a reomp diganeoc'h
eta mirout ho plas **dre ret** a-raok ar 1añ a viz Du : **postel@
skoluhelarvro.org**

pe da **Skol Uhel ar Vro, Kastell an Erminig, 6 straed
an Nor Bostern, 56000, Gwened**

Philippe ABJEAN (ganet e 1953)



Ul Leonad betek hed an neu-denn, studioù prederouriezh ha goude kelenner er C'hameroun hag en I.V. Kreiz-kêr e Kastell-Paol.

Ur mennozh nevez, adsevel, e 1994, "an Dro Breizh" a-dennañ. Er bloaz 2000 e laka ouzhpenn an hentad arouezius Naoned-Gwened. Bep bloaz e weler

tost da 2 000 baleer o kemer penn an hent mojennel aesaet ha skañvaet gant muioc'h a lec'hioù aveiñ hag a lec'hioù relijiel evel chapelioù.

Setu 5 bloaz 'zo e teu da wir ur raktres digredus e Karnoed; delwennoù bras Sent Breizh, 15 tonennad a bouez e pep hini anezho. 50 a zo bet savet c'hoazh ha 80 000 gweladenn a zo deuet eno e 2013.

Evit adreiñ ur vuhez speredel d'ar chapelioù en deus savet Philippe « Micherourien an Aotrou Doue » ha « Kompagnuned Breizh » evit lakaat tud hag arc'hant er jeu.

Ur raktres divent all a vo boulc'het e 2015 : « Kêriadenn veur ar bed » war degadoù a zvezhioù-arat, gant traoù arouezius eus glad arkitektouriezh ha dizanvez ar bed.

Félix ha Nicole LE GARREC (1930 ha 1942)



Sot-pitilh int o-daou gant ar foto hag ar sinema. Luc'hskedennerien int bet da gentañ e Ploeneur-Lanwern. Labour o deus bet gant Jacques Perrin (evit « Z » gant Costa Gavras); ha goude e kavont fred evit ober kelaouadennoù.

E 1969 o deus kenlabouret gant

René Vautier hag e e krouont Unvez produiñ sinema Breizh ha diwar se « Avoir vingt ans dans les Aurès » (R. Vautier, 1972. Priz ar filmvarnourien etrebroadel e Cannes) ha « La folle de Toujane » (R. Vautier, kenaozet gant Nicole Le Garrec). 1977 : krouidigezh Filmoù Breizh: filmoù niverus diwar-benn ar Festival Etrekeltiek, Diwan, al laboused saotret gant ar mazout, ar pesketa ha dreist-holl « Des Pierres contre des fusils » stourm Plougoñ, a vo skignet e pep lec'h er Frañs. E 1981 e teu da wir Stal Rannvroel Sinema Breizh (ARC): eno e stummer filmaozourien yaouank.

Nicole ha Félix o deus graet ivez teulfilmoù niverus, « La galoche », « Les portes du Danube » ha « Per-Jakez Hélias, l'Émerveilleur », hag all.

Jacqueline LECAUDEY-LE GUEN (1948)



Ur Vretonez an hini eo eus Poissy (78) el lec'h m'emañ o chom abaoe 1958. Merket eo he buhez personel ha micherel gant Breizh. Atav he deus soubet e buhez vreizhek Enez-Frañs asambles gant he gwaz Patrick Le-caudey hag o fevar bugel, holl dañserien ha sonerien hag a laka startijenn e kelc'h Poissy.

E-pad ar vakañsoù (e ti an dud-kozh e Kerged pe e Kergigod e-kichen Susinioù ha goude o marv e ti an eontred

ha moerebed e Lokentaz hag e Beg Ruaod, e kemeront perzh e Kelc'h Sarzhav hag e hini Lokentaz.

Bez' eo ivez Jacqueline unan eus kezeg-labour ar gengevredigezh Kendalc'h en Enez-Frañs.

Merañ a ra, eus he micher, stal Coop Breizh Pariz abaoe 1973.

Met neuze piv a lakao un harz etre he buhez personel hag he hini vicherel? Jacqueline a zo e pep lec'h, er c'helc'hioù keltiek, e Coop Breizh prest bepred da gelaouiñ, da reiñ alioù, da skoazellañ.... e korn-bro Pariz.

Erwan VALLERIE (1944)



E vamm, Simone Kavalan, a oa ur vrezhonegerez eus Montroulez. Pêr, e dad, jeneral ha rezistant, a oa eus Breizh-Uhel, etre Komborn ha Felger. Ezel eus ar CELIB e savas ar strollad breton "Sav Breizh".

E 1969 emañ Erwan gant Yann Choucq, Xavier Grall, Gwenc'hlan ar Skouezeg hag Alan Gouel e-touez diazezerien Skoazell Vreizh (skoazell d'ar brizonidi bolitikel).

Tremen a ra an aotreegezh vrezhonek e 1981. Kas a ra da benn ur pikol tezenn e brezhoneg, an eil eus ar seurt-se, anvet « Diazezoù studi istorel an anvioù-parrez » a vo embannet e 1995.

Bloaz goude e tizolo un dornskrid gwenedek diembann eus penn kentañ an XXvet kantved en un isrannyezh wenedek, lakaat a ra 10 vloaz d'e studiañ hag e sav ur c'heriaoueg a 3 812 ger.

Dont a ra er-maez e 2003 « Ils sont fous ces Bretons! », ur bennoberenn fentus-mat gant tresadennoù Nono. Kerkent e ra berzh: 100 000 skouerenn gwerzhet e 2012 ha n'eo ket echu.



D'ar Sadorn 15 a viz Du 2014

e Kastell Duged Breizh
e Naoned

Kendiviz ha lid
Kolier an Erminig



SKOL-UHEL AR VRO
INSTITUT CULTUREL
DE BRETAGNE